

## KELENNADUREZ,

*Var ar C'holera, great gand ar C'hon-sail karget, en departaman, da rei da anaoud ar pez so gwell da ober evid en em zivoal euz ar c'hlenved-se, ha para.*

AR PEZ A RENKER DA OBER EVID EN EM  
ZIVOAL EUZ AR C'HOLERA.

Ma n'hoch ket boazet da zebri na da eva ré, na da zebri na da eva traou kontroll d'ar iec'hed, heullit ar bevans-se.

Rak se, arabad ev dibri frouez ha na vent ket paô, hag ispisial avalou a kestenn. Dilezit ar guin ardand hag an oll likeuriou great gant guin ardand; n'euz netra goassoc'h evid ar boan bouellou. Dalc'hit prob ha nead ho tiez, ha pellait diout-ho kemen a helfé lorri ann ear vad enn dro dez-ho. Bep mintin, digorit ho torojou hag ho prenestou evit chasseal ann ear fall, ha ranevezi ann ear vad.

Tolid evez euz ar vrumenou teo ; ne  
zalc'hit ket var n'oc'h a zillad gleb ; ne  
gouskit morsé er meaz ; ha dreist peb tra,  
var ann douar fresk pe gleb.

*Ar pez a renker da ober pa gommanser  
klenvel, evit mirout deuz ar c'holéra  
da vont larkoc'h, pe, da viana, sikour  
ar re glan da barea essoc'h goude-ze  
gand ar remejou a vezo roed d'ez-ho.*

E veza ne baker ket ar c'holéra ann  
eil gand egile, ann dud a galon vad a  
hell, heb aoun ebed, kemeret soursi euz  
ar re glan, ha roi dez-ho ar remejou kenta  
pere a zo simpl-bras hag eaz da roi a bar-  
feted.

Cetu aman ar merkou kenta eus ar  
c'hlenved : ar stomok a deu da veza  
pounner, koll a rer goud evid ar boued,  
ar bouellou a deu da glenvel ha da gro-  
zal, hag ar c'hof a deu da danoat.

Ar merkou-ze purvuia a zo nebeud a  
dra ; nez enn eun amzer a g'holéra e  
renker toll evez, ha toll evez mad.

Cetu aman ar pez a renker da ober :  
dibri nebeud, pe guell, chom eb dibri ;

en em c'holo tom ; en em lakaat er guele, ha klask e peb fesson c'houezi a c'houezi dourek. Evit kemen-se, eva aliez tassadigou tizan great gant thé, sos-munud, kamomill, till , etc.

Ma ne heller ket tréchi ann danouenn gand an tizan-ze, e renker roi lavaman-c'hou great gant dour riz, pedour amidonn mar da ann denn klan aliez var vez arabid ev roi dez-an nemed eur c'hard lavaman goude bep gouec'h.

Mar teu an denn klan da ristoll, da gaouet kredien, da gaouet riou de dreid, de zaouarn, neuze a vezo red el lakaat enn eur gouele tomet mad araok hag entre diou vallin c'hloan, ha lakaat en dro dez-han kals boutaillo lun a zour tom ; lakaat var e stomok hag et gof serviedi pe palastrou ann tomma possubl; frota e vemprou gand eun tam flanell tremped er guin ardand kamfred ; roi dez-han, bep anter-heur, eun anter tassad tizan deuz ann hini hon euz komzed ; ha, mar dev red roi kals tassadou tizan tom, roi ivez, amzer da amzer, bannaou dour ienn entre ann tassadou tizan tom, hervez sec'hed ann hini klan.

Palastrou great gant moutard, ha lakeet, brema var ar c'hof, goudé var ann treid, a zo mad braz evid ober d'ann domder sevel et korf ann denn klan. Ann domder eo ar merck serten e ra vad ar remejou, hag e c'heller para.

Mar teu, en desped d'ann oll remejouse, ar c'hlaz da gregi e memrou ann hini klan, mar teu e gorf da sklassa, mar teu e visaj hag e zaou lagad d'en em denna, mar teu e vouez da zen plaad, e groc'hen da c'hlaza, e gorf da dreutaat buan, etc., e renker neuze labourat muioc'h da ober d'an domder sevel.

Kemen a ma vezo possubl eur medicin en em zalc'ho e peb meri evit servic'h ar re glan a helfe kaout ezom eus ho avizou, eus ho remejou.

*Goueled hag approuet gand ar Prefet  
euz a zepartaman Finister,*

**BRISSOT-THIVARS.**